

- 71 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

109. ANAIK DONVAL

(follennoù 69-71)

Anaïk Donval e brawa plac'h  
Zo var an douar mar boa biskoas.

Anaïk Donval a lavare  
De breur kloarek ag an deï-se :

- Guisk-te, va breur, ta habid ven  
Me visko va habid satin ven,

ma zaïmp on daou d'al leur neve  
brawa daou zen a vezo ene.

e breur kloarek a levere  
D'Anaïk Donval ag an deï-se

- Me ne hin ket d'al leur neve,  
gant ar markichen o° goudrouzet

°komp. on

- Gourdrouzed an eb a garo  
D'al leur neve me a ielo.  
Mar be sonnerien me a zanso.

eun dantelezou var e manchou  
el ledandet eun treus bado,

Anaïk Donval a lavare  
Dar sonnerien ag an deï-se :

- Sonnit, sonnerien, sonnit je  
Ma tanso ma breur kloarek ha me.

He breur kloarek sur a welle  
Na kave den er c'honsole  
nemed e c'hoar onnez a re :

- Teviã, va breur, na voelit ked  
Me iel da c'houren mar bez red.

A mar beffe-me eur pennad-bas  
Ne raffen fors a seïz kleze noas

- 72 -

Ne voa ked e ger peurachuet  
eur vaz en e dorn dezi zo roëd  
Da c'houren deus ar varkichen e zeo ed.

Kris e viche ar galon na voëlche  
el leur nevez an eb a vije,

vellet al leur nevez e rucha  
gant goad ar markichen e skuilla.  
Anafik Donval oc'h e<sup>o</sup> laza  
e breur kloarek e hazista.

°e, kompr. o

E breur kloarek sur a voële  
Ne have den der c'honsole  
nemed e c'hoar onnez a re :

- Tavid, va breur, na voëlid ked  
Me ielo da baris mar bez red.

Ne voa ked e ger perfinisset  
e liser deñ a zo deuet,  
da Paris e deus ranket monet

- Bonjour Roue a Rouanez  
Me zo deud iacuankik d'ho palez.

- Petra he en torffet o heus gred ?  
- Seiz dijentil a meus lazet  
Sovetei buez ma breur kloarek  
A va enor a meus miret.

- O honor ma no heus miret,  
Plahik, no pezo droug e bed.  
Me ia da skriva deoc'h eul liser  
evid ma zeot hardis d'ar ger.  
Me ia da skriva deoc'h eur lib-passant  
Do laza din evel kelien.

~~~~~  
vvvvvvv

Mari Bozeg, 18 Févr. 1851

~~~~~  
vvvvvvvvvvvvvvvvvv